

BREZEL AR PRUSS

ha

Trahissonou ar Franç

Me meus c'hoant da goseal d'eus va amzer dremenet,
Rac re a bret oun da goms d'eus ann hini da sonet,
M'ar plich ganec'h bretonnet presta hoc'h intantion,
Ar ganaouen a gredan a toucho ho calon.

D'ar bemp d'eus a vis east, me m'eus bet ma faper,
Evit monet gantan betec ar guer a Guemper,
O Doue! va c'hrouer, na pebeus calonad,
A rin me gant va feuillen, ha d'am mam ha d'am zad.

Me ya da vont ho bete gant neubeut a gourach,
Contristet oun pa glevan issu d'eus va beach :
— « Salud dec'h va zad, va mam, d'eus a greis va c'halon,
Eur c'helou zo ganin a doucho ho calon. » —

— « Petra a zo a-nevez, lavar d'imp va mab quer ? » —
— « Larin quiet va zad, va mam, sellet eus ma faper,
Ar roue a gommand d'in, hennes zo eur mestr mad,
Evit senti a renquan dont breman d'ho quitad. » —

Va zad a lavar d'in me, e galon contristet :
— « Te a voa va esperanç en amzer da zonet,
Hennes zo eun tam paper a zeu d'am glac'hari,
Ne moa nemet eur buguel, hac a renquomp separi.

Oh ! va C'hrouer beniguet, petra rin me breman,
An oad a zo em c'hever, quitad va mab a renquan,
Te a voa va esperanç en amzer da zonet,
A va appui em c'hosni, ma vijes ganin chomet. » —

— « Me o ped va zadic quez, da guemer confianç,
Rac goude pemp blaves, me m'eus c'hoas esperanç
Da returni d'ar guer, va bro guès biniguet,
Ar guer demeure a Guergroas, eno man va zouet. » —

— « Aouen a meus, va mabic, na renqui sur mervel,
Rac te a renquo breman partial d'ar brezel;
Pa sonjan 'bars en draze, va c'halon a vanç d'in,
Rac danjeriou zo breman, se allan assuri. » —

— « Tavit gant se va zad, a galon me o ped,
Rac ben pa vin disquet, ar brezel 'vo echuet;
Rac nemeus quiet esperanç da vonet d'ar brezel,
Houman a zo eun affer a na bado quiet pell. » —

Va mam, 'bars er c'hoste-all, a glevan o vouela.
Aouen a meus em c'halon na renquo sur simpla :
An dour d'eus e daoulagad a velan o redec,
Evel demeus eur sourcen, an dra-se zo calet.

— « Me o ped va mamic paour da zihan da vouela,
Rac an amzer a bress, partial a renquan ;
Red eo dimp dispartial, me a vel an dra-se,
Quemense, va mam guès, a ra poan d'in couscoude. » —

— « Na lavar quet d'in, va mab, dihani da vouela,
Me a vouelo bepret quèit a ma vin er bed-man. » —
— « Laret quet se va mam, m'ho ped en em gonsolet,
Rac m'ar teu deoc'h chom elan, me a vo glac'haret.

Me a ya breman da Keraès da gomanç va beach,
Ha pa vin eru eno a larin : Adieu ! adieu ! dac'h ;
Rac-se va zad a va mam, confortit ho calon,
Rac eno a vezo hon separation. » —

Pa voan o font da Keraès, ha va mignonet d'am heul,
— « Adieu ! mese, Yvonic, rac dit n'in hon d'eus queus ;
Sel aman ar post, prest eo da bartia. » —

— « Neuse e zan da antren, queno a laran brema.
— « Queno va zad ha mam, queno va mignonet,
Queno a laran d'an oll, 're zo d'eus va c'hlevet,
Rac eun taol chanç a ve d'imp, eu eur gaout james,
Hep manquout hini bet 'bars er gompagnunes.

— « Adieu ! a laran d'am fares, hac adieu d'am c'hanton,
Adieu ! a laran d'am bro, gant queus 'bars va c'halon. » —
Breman 'zan a dra certain da gommanç va mizer,
Hast a meus da veza eru 'bars er guer a Guemper.

Cetu m'in 'bars en Quemper, eruet memes deis
An deis varlerc h m'eus cavet cals a vignonet.
A daou serves goude-se a voamp bet partiet
Evit ar guer a Amiens, cetu m'in pell rentet.

D'an daouzeec d'eus ar memes mis, m'in voa bet guisquet,
A d'an drizec eur fusil, brema m'in zo armet,
D'ar bevarzeec a gomanceer distribua d'imp-ni
Lien tantennou, piquejou, evit gallout campi.

D'ar bemzeec ar memes mis, da bemb heur eus mintin,
Barti va c'hamaradet, se ra d'in cals chagrin ;
Demeus a dri c'hant breton, na voamp quet quin chomet
Ebars er guer a Amiens nemet... nemet naontec.

D'an dri-varn'uguent a vis eost a voant ive partiet
Evit ar guer a Baris, eur guer gær meurbet ;
Daou derves a voant chomet neuse 'bars er guer-se,
D'an drede voant partiet evit fort Auberville.

Pa voamp bet eru eno, 'zo gret d'imp-ni campi,
Breman a rankomp cousquet voar ann douar yen,
Pell-zo e m'eus bet elevet penaos buez an den,
'Zo enni diou, teir amzer, breman a gredan-se.

N'eus quet c'hoas pell amzer, e zoun deut d'eus ar guer,
Couscoude a meus guelet m'eur a sort a amzer ;
Bep pevar derves e zeo ret d'imp-ni monti ar grand-gard
Hac e zeo ret monet guel bell, an dra-ze a zo stard.

Er gommançamant quenta, ni zo c'hoas enn onn ès,
Rac an amzer a zo tom, cavet ve patates,
Cavet a ve rezin, cavet ve avalou,
Saladen, col, articho, enfin bep sort frejou.

Breman ne vank d'imp netra 'vit beza enn on ès,
An diessa a gavomp e zeo cousquet er mes,
A neuze ar Prussianet ne maïnt qet c'hoas voar dro Paris,
Sonjal remp pa erufont e vont casset var ho c'his.

Mes allas ! an amzer-ze n'en deo quet pell padet,
En em gavet a zo d'empech cals a Brussianet,
Ha n'in hac ho reuli, hac ho lezel an dud-se
Da guemer positionou, hac ec'h allemp miret ane.
Hac an dud-se neuze da gommanç labourat,
Ne raïnt quet c'hoas drouc abet quen e vont placet mad,
Mes pa vo gret ho labouriou, neuze vezo d'imp dies
Ober dezo disquel d'imp talonou ho boutes.

D'ar bevarzec a vis here, 'voa quemeret Bourje,
Gant ar franc-tirerrien, cetu m'an d'imp are,
A d'ar bemzec neuze, abret d'eus ar beure,
A c'ha soudardet enni, n'ouzer quet an nombr anc.

Aben eur pennad goude, ma voamp bet aruet,
Eul leo benac diouzomp, zo cals a Brussianet,
Hac hon c'hanollou neuze a gommanç da stracal.
Biscoas c'hoas 'bars va buez, ne m'oa guelet quement-all.

Ouspen tri-uguent pes canon, 'voa gant ar Prussianet,
A ganimp-ni ne voa quen nemet an nombr a zaouzec :
Peder mitrailleus a voa ganimp, a neuze eis pes canon,
Stracal a raïnt a hep-tu, quen a grene hor c'halon.

Epad an devez-se neuze ni voa o combatti,
Hep e m'amp gallet biscoas cavet eun tam da zibri ;
D'eus an nos e voamp chomet neuze 'bars er Bourje,
N'eus quet re drain ennomp, galout ret compren-se.

Aouen m'oamp a dra certen, en nòs da veza attaquet,
Mes an aouen da virion, assur a zo digouezet ;
Potret ar Pruss voa commancet varnomp da denna.
Hac e voa eur fusilladee enno d'eus ar vrassa.

Ennon m'oa gret va sonch da zonet da vervel,
Mes preservet e zon bet, dre c'hraç an Eternel.
Goude an espaç d'eus a ziveur, pe a diveur aoter,
A reulas an dud vil, gant aoun d'eus ho ler.

Mes an deis varlerc'h vintin, querquent a ma voa scler.
Glevomp boulejou canon ho yudal 'bars en er ;
Cetu ar gombat sanglant a nevez commancet,
Ar vech-man e m'eump gret oll hor sonch da vout lac'het.

Coueza ra tud d'an douar, assur va mignonet,
Demeus an daou goste 'voa cals a dud lac'het ;
A cetu eur General e clevemp o laret :
— « Ret eo d'imp reuli dirac hon enemiet. » —

Da vati 'bars er retreat, cals a dud a voa contant.
Ampechet mijemp aneze, ma nijer ar mestrou c'hoant.
Da antreal 'bars en quer, me bromet an dra-se,
An drahison eo ouman, gouet a vo quemense.

An deis-se nimp voa trouplou, assur 'bars er guer-ma,
A voa capabl da laquat andouar da grena,
Ouspen tri-uguent mil den a voamp en dro d'ar Bourje.
Mes divezatoc'h d'e dro en evoa queus da ze,

Pa voant ho hantren en quer a dant bet quemeret
Tost da tri mil den demeus ar mobiliset ;
En dro da guer ne veler nemet corfou maro,
A re blesset maleurus, quen a sclass hor c'halono.

Cetu man ar Prussianet adare bars en Bourje.
Gout a rer evit petra, discleriet e ar virione,
Eur General maleurus an eus hon trahisset,
Mes breman d'eus ar pales a he ive chasseet.

Homan so eun drahison velt a so bet cals c'hoas,
Mes nompas evel homan, rac a rese a voa goas ;
Cridi a ran, bretonet, a housoc'h couls a min,
Mes min a sisclerio dac'h ar guela ma c'helin.

Goassa trahison so bet a voa er guer a Sédan,
Nounquet evit coseal, rac ma c'halon a so clan,
Guelet eun Ampereur ho renta e c'hese,
Ho ! mes a disenor, vit eun den a galite.

An Ampereur Badinguet nevoa livret an n'he
Hon soudardet da Guillaume, ebars ar Pruss Roue,
Ouspen cant mil, er guer-se, en evoa bed livret,
E c'hard, e artilliri, soudardet a zouavet.

Non quet pelloc'h evit coms eus eun drahison quen cruel.
Eun debes vo punisset sur gant an Eternel,
Henes voar ar virione, allas ! ni n'ousomp quet
Evit petra e so en Franç brema eur sort lac'hadee.

Na bad pelloc'h ma c'hallon da bresec d'eus ar guer-ma,
Ret e din brema tevel petramant renquin simpla ;
Are so bet lac'het enne a souetan dese
Besan bars ar barados assambles gant an eles.

Neuse ar maréchal Bazaine en eus gret capituli
Ar c'henvran citadel d'eus Franç, mar queret ma c'hridi,
A d'eus ar brava queriou so certain bars en Franç,
A memeus bars en Europ, n'eus quet a souetanç.

Na m'eus quet c'hoas lavaret hano ar guer terrubl-se
Pevar fort so en dro deï, so imprenap ive,
Pemsec a tri-uguent mil den a gonter ive en Mets
Ar Prussianet so enni, ia dre eun taol funest.

Considerit, Bretonet, na pebeus chenchamant
A so certain en Franç ebars en eun instant :
Neus quet pel d'eus an Europ ni voa ar c'henta soudardet
Ha breman omp disquennet da betec ar bevarvet.

Mar meump collet ar bresel-man ne que sur dre hon fot,
Rac nequet hor santimant a vanque dont aroc
Trahisset a homp bet aboe ar gomansamant
Da betec ar fin e vimp, a lavar an dud savant.

Homan a so eur bresel inhumen a barbar,
Biscoas eur sort lac'hadee n'eus bet var an douar
Evel a so breman, an oll dud a voar se,
Mes ret e n'em gonforti pa ouser ar virione.

Casi an anter d'eus Franç a so d'ar Brussianet,
Clasq mont e Paris e maïnt evel tud arrajet,
Mes allas red e de chom ene eur pennad mad,
Ben pa vont antreet enni vo scuillet cals a voad.

Bemde bars en dro Paris so eur bresel benac,
Biscoas c'hoas en dro desi n'eus scuillet quement a voad,
Evel a rer breman epad amser ar siech
Ar Brussianet a sonje de penos nom gavout trech.

Ma ve ret din rei an depeign d'eus ar bresellou so het
Ebars en tro Paris a ven rentet soueset,
A savantoch evit-on ve couls a me nec'het,
Rac evit esplica tout n'eus den abet capet.

Eur veach e voamp commancet da avanç bars ar goan,
Neuse a chome cals demeus ac'hanomp clan,
Biscoas guele na meump bet boe e commancet ar siech,
O hober eürus a vemp pa ve cavet plous sec'h.

Gant an naon hag anouet a varv cals a dud,
Ebars an tranchiou, ep ober cals a vrud,
Cousquet var an ere'h, ar scorn hag ive bars ar pri,
An dra-man, ma mignonet, a zeu d'hon glac'hari.

James na meump bet debret, boe ar gomansamant,
Demeus a siech Paris, met quic quesec vaillant,
Er gomançamant quenta mimp a voa difficile,
A demeus ar c'hic queset na c'houlemp quet dibri.

Nemet er fin, Bretonet, ni sebre an traou tout,
Ne vanque nemet traoualc'h quement vijent d'hom gout ;
Debret a meus bet quic cas, debret a meus quic ki,
Na vanque nemet traoualc'h din dioute da sibri.

Breman a meump bara da sibri, mignonet,
A na vequet debret min assur gant quezec,
Couscoude ar gristenien so red de en dibri,
A re-man zo gret gant plous, gant kere'h hag ive riz.

Poent a he dime tevel brema, ma mignonet,
Rac en eur gonta re c'hui a vo annuihet,
A min na m'eus quet ive re demeus a amser,
An appel so prest da zon, re vanq a bunisser.

D'ar berzec a vis Even, n'eur sevel d'eus ar mintin,
Min an eum sante dies, samet voan a chagrin,
A min tapout ma fluen, ma liou a ma baper,
Min sonje a voan ho hont da scriva eul liser.

Cetu min commanç da scriva, ma speret bepret jenet,
A min hag o sonjal scriva en bresonec ;
A min hag a sonjal composi eur son
Vit cas d'am c'hamaradet na demeus ma c'hanton.

Han da esplica ma oad evel ma he gleet :
Cant daousec a pevar-uguent mil seis cant ugent heur so
[boe ma hon ganet.

Neuse han da laret dach ive ped minuten :
Uneec million pemp cant tri a tri-uguent mil , daou hant a
[so ouспен.

Min laquo dac'h ma hano ive, m a mignonet,
PRONEVEL e ma fares, QUIEC (YVES), hon hanveet :
Arog monet d'an appel ve d'unec heur anter,
E ar chanson composet bars en div heur amser.

Ebars ar guer a Galais e ar zon man composet,
Non quet penos a rin vit e c'hass d'am mignonet,
Rac ne quet eur pes goal vrao da gass pel d'eus ar guer,
Couscoude ma tri c'hant leo d'eus he vro ar c'homposer.


Cuit vin da glevet an dud o lavaret dime
Penos a he rimet fal, me voar voualch an dra-se :
Mes me o ped, Bretonet, da sont dam escusi
Mar na m'eus quet bet galet plijout d'ho fantasi.

Canit ma c'hanaouen, canit-hi, Bretonet,
Canit-hi en eur zansal hag a vin contant meurbet,
Neum zivertissit eta, me ho pet, ma sud quer,
Min reio assembles ganec'h pa vin erru er guer.

Soueti a ran d'an oll, da guement e lenno,
Ar joa, ar blijadur, ar gloar d'eus an envo :
A dime ma c'hunan a souetan ive
Da vont assables gante goude fin ma bue.

Propriété de l'éditeur,

J. H.



CHANSON NEVEZ

groët

'vit beza kanet en eured

EUR MOBILIZET

TON : Je suis natif du Finistère.

Eun devez a viz meurs diveza,
Me a oa bet goal estonet,
O weled eun denic ar zioula,
O lampad hag o redec ;
 Mez tro kan Conli,
 'Ra difuni,
Hag ober da bep mobilizet
 Lavaret :
Kênt 'vit mont ken da Gonli,
 Zûr, zûr e temezin.

Lezel reas ian he batatez,
E lec'h ma carjent da ziwvan,
Evit redeg gant cals euz a brez,
Warlerc'h eur vlondinez vihan ;
Rag tro kan Conli,
'Ra difuni,

Hag ober da bep mobilizet
Lavaret :

Kênt 'vit mont ken da Gonli,
Zûr, zûr e temezin.

Petra a zignifi kement-se ?
A c'houlennis-me 'n'eur c'hoarzin,
Lezel ar patatez-ze aze !

Ha redec prompt euz ma jardin ;
Ah ! tro kan Conli,
'Ra difuni,

Hag ober da bep mobilizet
Lavaret :

Kênt 'vit mont ken da Gonli,
Zûr, zûr e temezin.

Din-me e oa respontet neuze,
Gant eur goz komer routinet,
En hoil afferou euz ar sort-ze,
E oa Cupidon tremenet ;

Ha ! tro kan Conli,
'Ra difuni,

Hag ober da bep mobilizet
Lavaret :

Goel eo ganen eur plac'hic,
Evit n'eo kan Conli.

Croguet eo ar big en skouarn
Ianik ar Parc, paotr Conli,
Brema e raso troiou louarn,
Aliez hag en meûr a di ;

Rag tro kan Conli,
'Ra difuni,

Hag ober da bep mobilizet
Lavaret :

Goel eo ganen eur Janick,
Evit neo kan Conli.

An troiou louarn a zo groet,
En eur feson ar subtilla,
Eur fleuren a n'eus displantet,
A neo ket euz an distera ;

Rag tro kan Conli,
'Ra difuni,

Hag ober da bep mobilizet
Lavaret :

Goel eo ganen eur vregic,
Evit neo kan Conli.

Ia Coat-Izel te a zo cri,
En kenver da vignonet,
Rei da rozen da baotr Conli,
Rei dean ar vrava da verc'hed ,
Mez tro kan Conli,

'Ra difuni,

Hag ober da bep mobilizet
Lavaret :

Goel eo ganen eur plac'hic,
Evit n'eo kan Conli.

Penaos a ri etabrema,
Coat-Izol goz sao da ben,
Zel da voez hnel o wela
Gant ar c'heunz d'euz do rozen ;

Mez tro kan Conli,
'Ra difuni,

Hag ober da bep mobilizet

Lavaret :

Kênt 'vit mont ken da Gonli,

Zûr, zûr e temezin.

Cupidou, eme Coat-Izel,
Neo ket c'hoaz eet euz ar vro,
M'o c'heus diou pe deir dimezel,
Pep a gonlien o defo ;

Rag tro kan Conli,
'Ra difuni,

Hag ober da bep mobilizet

Lavaret :

Goel eo ganen ma Janik,

Evit neo kan Conli.

Evel-se 'ta coz dimezelet,
Pere n'euz c'hoant da zimezi.
Da Goat-Izel goz tostaet,
Hag o p'o pep a baotr Conli ;

Rag tro kan Conli,
'Ra difuni,

Hag ober da bep mobilizet

Lavaret :

Goel eo ganen eur vregik,

Evit neo kan Conli.

Ha c'houi brema daou den yaouane,
Pa oc'h dre eur c'houlm unanet,
En em geret brema hep mank,
Ha gant Doue veot beniget ;

Ha tro kan Conli,
Rai difuni,

Hag ober da bep mobilizet

Lavaret :

Goel eo ganen ma Janik,

Evit neo kan Conli.

Eûr vâd deoc'h a zouetomp,
Chans ha pep sort bonheurio ;
Vel-se d'ho c'honor e trikomp,
Araog laret deoc'h ken-a-vo ;

Ha tro kan Conli,
'Ra difuni,

Hag ober da bep mobilizet

Lavaret :

Kent vit mont ken da Gonli,

Zûr, zûr e temezin.

G. L.

Propriété :

J. H.